

KIS-574 – A-zivout Geriadurezh

(GE da RAH – 12 03 98)

[E sigur an notennoù gant R. LE NESTOUR diwar-benn *Geriadur an Armerzh, ar C'henwerzh hag an Arc'hant* gant Y.-B. AN NOALLEG, Preder, 1995]

RLN a ra un evezhiadenn bouezus : er geriadurioù brezhonek e kaver alies meur a dermen roet da gevatal d'ur ger gallek. Pezh na vez ket bepred un azon a binvidigezh met, en eneb, a davantagezh.

Geriadurourion 'zo a ziskler ober stad eus ar brezhoneg evel m'emañ hiziv gant e “300 000 yezher”. Diazezañ a reont war un aridennad gevier : an darn vras eus danvez o geriadur ne zeu ket eus genou ar yezherion met eus ar geriadurioù kent ; ar gerioù anavezet c'hoazh war ar maez ne vezont anavezet nemet er c'horn-mañ-korn, gant ur ster diflach, hag ar re o anavez a ra gant ar galleg er gedvuhez ha pa ve dre an arbenn eeun ez eus dindan ar gedvuhez un douaregor kalz ec'honoc'h eget ar c'horn-mañ-korn m'o c'homprenner ; brasoc'h touell zo c'hoazh : ar geriadurioù eus ar seurt a ro gerioù gallek ha gerioù brezhonek da gevatal o tic'houzout ez eo ar gerioù gallek parzhiat er gedvuhez werc'hel, fiñvus ha krouus, hag e teu ar gerioù brezhonek eus ur gedvuhez aet da get pe eus aspadennoù troc'het pell 'zo diouzh dialusk ar gevredigezh ha dre se sonnet en ur steriegezh varv. Skouer ar geriadurioù-se eo hini F. FAVEREAU.

Geriadurourion all a venn dastum kement brezhoneg a zo hag a zo bet : o danvez a dennont eus ar geriadurioù kent, eus skridoù an 19t hag an 20t kantved, eus kinnigadennoù diorreerion ar yezh ; o amkan eo pourchas gerioù d'un danvez kevredigezh vrezhonek ; o gwan eo meskañ al ludu gant an eginou, termenoù o taveiñ d'ur gedvuhez aet da get gant termenoù o taveiñ d'ar gedvuhez werc'hel a vez ar yezherion o kemer perzh enni dre ar galleg ; an doare nemetañ da barraat ouzh ar gwan-se eo azbevaat al ludu, eleze troc'hañ krenn an termenoù diouzh o steriegezh dispredet hag o daveiñ d'ar gedvuhez werc'hel. Anat e chome ar c'hammed-se d'ober gant geriadurourion *An Here* goude o embannadur kentañ.

Kammed hennezh a voe graet gwerso gant saverion geriadurioù kalvezel *Preder* — dre ret, rak an diskiblezhioù ma labourent oa re ar gedvuhez werc'hel.

Koulskoude, ouzhpenn ar mankoù boas da nep trevell diorren yezh, ez eus ur si o devez da ziwall dioutañ : na zispartiañ fraezh a-walc'h lavar diskiblezh ha lavar boutin. El lavar boutin e vez neuennus steriegezh an hanc'herioù, fiñvus glennadur ar stervaoù ha, dreist-holl, er c'heñverioù-se he deus pep yezh he dedroadur dibarek — ken ez eo reizh evit ar geriadurioù reiñ meur a dermen eus ur yezh da zamgevatal da bep termen eus ur yezh all (ar c'henglotadurioù o tont war wel dre ar pleustr hepken). En eneb, el lavar diskiblezh en deus pep termen ur ster diforc'hell, pep pennanv un ergeñverenn resis — da heul e vez kesaezhat ar c'henglotadurioù a yezh da yezh. Er stern-se emañ da intent an azgwel a venn RLN ober war ar geriadurioù kalvezel, war *Geriadur an Armerzh* en degouezh. Arabat diwelout evelkent ez eo ar geriadurioù evel hemañ ul labour gwastadour ; ouzhpenn se, en abeg d'ar goull o ren tro-dro, e kavas mat YBAN na gantañ e hanc'herieg d'an diskiblezh : evitañ e veze a bouez bras, ha se a vez priziet gant an arveriad, lakaat en tu all d'an termenou kalvezel strizh un niver bras a c'herioù hag a droiennoù eus ar vuhez voutin. Setu perak e kaver kichen ha kichen danvez arbennik peurreis ha geriennoù pemdeziek, fiñvus dre bennaenn o steriegezh ha dispis bevennoù o sterva, ken ez eus a-wechoù un termen kalvezel gallek dirak meur a dermen brezhonek — peadra da ziaezañ an arveriad. Dav evelkent d'an arveriad gouzout e rankas alies an aozer krennañ dre abegoù a embannerezh. Ouzhpennañ a rin en deus kenderc'her a'n talbenn muioc'h eget nep piv bennak ar gwir da faziañ. Forzh pehini e ve an degouezh, en deus YBAN, evel pep hini ac'hanomp, labouret gant ar mennoz e teufe tud all da genderc'hel e labour ha, da gantañ, dre arnodin e ginnigadennoù en o c'hedvuhez. Pezh a rit dre brientin ho hanc'herieg. Pezh a ra RLN dre wiriañ kevazasted an termenou kalvezel brezhonek diwar-bouez an termenou gallek kevatal. Dezhañ neoazh, evel dimp holl, da hepkorin daou zañjer : da gantañ, chom betek re en amgant ar galleg skiantel ha kalvezel, distremenet hiziv war veur a boent gant ar saozneg ; d'an eil, davein strizh eus an eil yezh d'eben gerioù ankalvezel (n'eo ket peogwir e chom da zont c'hoazh ul lod mat eus brezhoneg boutin ar gedvuhez e tleomp e lakaat da zont plaket diouzh ar galleg).